

BACCALAURÉAT TECHNOLOGIQUE**SESSION 2007****BRETON****LANGUE VIVANTE 2**

Série STG (Sciences et technologies de la gestion)

Spécialité « communication et gestion des ressources humaines » Coefficient 3**Spécialités « comptabilité et finance d'entreprise » Coefficient 2**
« gestion des systèmes d'information »
« mercatique »**Durée de l'épreuve : 2 heures.***L'usage de la calculatrice et du dictionnaire n'est pas autorisé.***Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.**
Ce sujet comporte 3 pages numérotées de 1/3 à 3/3.

Compréhension	10 points
Expression	10 points

An den a glaskas plijout d'an holl

Ur wech e oa ul labourer-douar a oa o vont e kêr da werzhañ e azen. E vab a oa gantañ. Al labourer-douar a gase an azen war-bouez ur gordenn hag e vab a oa o kerzhet en e gichen.

Hebiou¹ div blac'h e tremenas al labourer-douar hag e vab. Hag ar plac'hed ha kregiñ da c'hoarzhin goap outo.

"Petra zo a-dreuz gant hoc'h azen ?" a c'houlennas ar plac'hed.

"Tra ebet", a respontas al labourer-douar. "Emaon o vont e kêr d'e werzhañ, ha kalz arc'hant am bo dioutañ."

"Droch oc'h avat, p'emaoc'h o kerzhet a-hed an hent", eme ar plac'hed. "Lakait ho paotrig war kein an azen 'ta !"

C'hoant en devoe an den da blijout d'ar plac'hed. Lakaat e vab war kein an azen a reas eta, ha bale en o c'hichen.

Pelloc'h war an hent en em gavas al labourer-douar hag e vab gant un den kozh. Hemañ a hejas e vazh ouzh ar paotrig.

"N'ec'h eus ket mezh, neuze . "Te zo war kein an azen, p'emañ da baourkaezh tad o kerzhet !"

Evit plijout d'an den kozh e tennas al labourer-douar e vab diwar kein an azen hag ez azezas-eñ war al loen.

Pelloc'h c'hoazh en em gavas al labourer-douar hag e vab gant un nebeud maouezed ha bugale. Unan eus ar maouezed gant he biz a ziskouezas al labourer-douar :

"Sellit 'ta ouzh an den lezirek-se !" emezi. "Emañ war kein an azen hag e vab kaezh a rank bale !"

Evit plijout d'ar vaouez e lakaas al labourer-douar e vab gantañ war kein an azen.

Hag o-daou delc'her² gant o hent. Hebiou ur bagad gwazed e tremenjont.

"Hag hoc'h azen eo hemañ ?" a c'houlennas unan eus ar wazed. "Lazhet e vo ganeoc'h mar e lakait³ da zouggen un den pounner hag ur paotrig. Perak 'ta ne zougfec'h ket an azen ?"

C'hoant en devoa al labourer-douar da blijout d'ar wazed, setu e tiskennas diwar kein an azen hag e lakaas e vab war an douar ivez. Liammet e voe treid an azen ha staget al loen ouzh ur vazh hir. Stourm ha reiñ taolioù treid a rae al loen kaezh.

Pep a benn eus ar vazh war o skoaz ez eas al labourer-douar hag e vab tre e kêr en ur zouggen an azen.

Tud kêr a c'hoarzhhas pa weljont ur gwaz hag ur paotrig o tougen un azen. Redek a rejont da heul al labourer-douar hag e vab en ur c'hoarzhin hag en ur huchal.

Spontet e voe ar paourkaezh azen. Skuizh e oa al labourer-douar hag e vab, ha tomm e oa dezho. Lakaat an azen war an douar a rejont. A daolioù treid e teuas an azen a-benn da vont en e frankiz hag ez eas kuit d'ar c'haloup.

Kouezhañ er stêr a reas, ha beuziñ.

Trist e oa al labourer-douar p'edo o tistreiñ d'ar gêr.

"Klasket em eus plijout d'an holl", emezañ d'e vab, "da zen ebet avat n'em eus plijet, ha kollet em eus ma azen."

Marsel Kevareg, Mojennoù Aisôpos, An Here, 2000

¹ e-kichen

² derc'hel

³ ma lakait anezhañ

I - Compréhension (10 pts)

Respontit d'ar goulennoù :

Répondre aux questions par une phrase au moins :

- 1- Da belec'h e oa al labourer-douar o vont ha d'ober petra ?
- 2- Perak e rae ar merc'hed goap outo ?
- 3- Perak e oa bet selaouet o ali gant al labourer-douar ?
- 4- Pet gwech e cheñchont o ali hag abalamour da biv ? (2 boent)
- 5- Penaos ha gant petra e oa bet douget an azen ?
- 6- Perak e oa bet spontet an azen ?
- 7- Gwerzhet ker e oa bet an azen ? Perak ?
- 8- Petra eo kentel ar fablenn-mañ ? (2 boent)

II - Expression écrite (10 pts)

Dibabit unan eus an daou sujed kinniget ha savit ur pennad (200 ger) :

Choisir l'un des deux sujets suivants (200 mots) :

1-Hag un dra vat e klask plijout d'an holl dud ? Petra ober e plas al labourer-douar ?

2-Ijinit ur fin disheñvel d'an istor adalek "en ur huchal"(l. 34).